

## KIS-358 – Gl. attentat à la pudeur, h.a.

(GE – 12 88)

Kemm a laka ar Gwir gall etre *attentat à la pudeur* hag *outrage public à la pudeur* (melladoù 331 ha 332 a'n Dezveg kastizel), tra ma ra ar Gwir saoz ur rummenn hepken dindan an anvad *sexual offence*.

Gl. **attentat à la pudeur**. Embreg revel renet ouzh un den hep e asant pe ouzh ur bugel dindan 15 vloaz. Br. **darwantad g.-où revel**.

Diforc'h a ra al lezenn e Frañs etre **attentats à la pudeur sans pénétration**, Br. **darwantadoù revel hep sankadur** (anezho touchadurioù ouzh an tachadoù ganadel diwar-bouez an daouarn, ar genou, ar c'halc'h pe nep korf estren, greadoù orgedel rizhek pe amrizhek diseurt, sl. GBLF., ¶ 903) hag **attentats à la pudeur avec pénétration**, pe **viol**, Br. **darwantad revel gant sankadur pe forzhidigezh b.-ioù**.

Gl. **outrage public à la pudeur**. Real, jestr pe emzalc'h, revel e ster, graet en ul lec'h foran, o trozañ reolennoù degemeret ar gouelez ha, dre se, gwarzhus. Br. **dismegañ foran ar gouelez**.

O c'hortoz ma vo diazezet lavar ar Gwir, ne c'haller nemet kadaviñ termenoù war stervaoù. War sterva an torfederezh, e welan :

Br. **felladenn b.-où**, degemeret da gevatal da Gl. **délit** ; deveradoù : **fellad-enner, feller, felladenniñ**.

Br. **koul g.-ioù**, Gl. **crime**.

Br. **torfed g.-où**, Gl. **crime** (yezh voutin).

Br. **torradenn b.-où**, Gl. **infraction** ; deveradoù : **torradenner, torradenniñ**. [GEAK., p. 110 : **torridigezh, torradur, torr lezenn ; torradour**.]

Br. **argevez g.-ioù** en un sterva gant **koul, torfed**.

Br. **darwantad** (kv. hBr. *aruanta*, Br. *arwant, arwantel*), Gl. **attentat**. [Kenderadoù war GEAK. : **darwantus** aa., Gl. **agressif ; darwantusted** b. *agressivité*.]

Br. **gourmest** g.-où (kv. hBr. *ormest*, Kb. *gormes*) [debarzhet dezhañ e ster hBr. gant GEAK., p. 33 : Gl. **calamité**].

Danvez termenoù dezho keñverioù strizh pe strishoc'h gant ar stervaoù-se :

Br. *darial* g. (kv. Kb. *arial* < *ar-gâl* "passion, vigour, spirit, nature, liveliness, courage, ferocity" ; Br. *gorial* "ressentiment").

Br. *kammez* g. (krBr. *camez*, *cammez* "? châtiment" ; Kb. *camedd* "crookedness, curvature ; perversity, wickedness").

Br. *kammvez* g. (Kb. *camwedd* "wrong, sin, transgression, trespass, misdeed").

Br. *gourzromm* g. (Kb. *gorthrum* "oppression, violence ; heaviness, sadness" ; kv. hBr. *trom*, *trum* "lourd, maladroit", Kb. *trum* "heavy, sad, wretched").

Br. *darougañ* (kv. Kb. "*amygaf* : *amwyn* to contend for, fight with ; take, seize ; defend, protect, deliver" GPC 103, Br. *amoug* "recours, aide", sl. KIS-327, La-08, pp. 293-297).